



Kelenner-ez war an DKS (Deskadurezh Korf ha Sport)

Kinnig labour embannet d'an / ar lund 23 mars 2026

Lec'h : **Kemper**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh **3 sizhunvezh**

Diouzhtu

Deskrivadur ar post-labour

Emañ Kevread Diwan o klask ur g-c'helenner-ez war an DKS evit ar Skolaj Diwan Jakez Riou e Kemper.

Post CDD - 16 e/sizhun (lun, meurzh ha yaou vintin)

Adalek ar 24/03 ha betek an 10/04/2026

Live kelenn : 6vet, 5vet ha 4re.

Kefridioù :

kas kentelioù hervez programmoù skol hervez ar liveoù
priziañ an araokadennoù ha gouiziegezhioù ar skolidi a-drugarez da briziadennoù
kemer perzh e buhez ar skol en ur labourat gant izili all ar skipailhoù
azasaat e zoareoù kelenn da ezhommoù ispisial ar skolidi evit gwellaat o en-dro deskiñ

Ma z'och dedennet gant ar post, kasit hoc'h emstrivadur (CV + Lizher en em ginnig) da eil.derez@diwan.bzh ha gant renezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh e kopi.

Skiant-prenet ha barregezhioù goulennet

Skiant-prenet ha barregezhioù goulennet

Aotreegezh STAPS rediet
Brezhoneg live B2

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://diwan.versio.fr/br/offres-emplois/professeur-e-d-eps-education-physique-et-sportive-230320261455>